

Rolland (Charles) Lanneanou, 1862, Gwerliskin, 1940).

Modernnaet eo bet an doare-skriva, ha reizet e vrezonég eur wech bennag. Levezonet eo gand ereadurez ar galleg.

Eun droidigez e galleg a zo e-kichenn ar skrid brezoneg. Gwechou 'zo e vez red selled ouz ar galleg evid kompren ar brezoneg, ken iskiz m'eo hennez aliez.

Diwar-benn Cornic ez eus eur bern traou war Google.

Klemmgan Charl Cornic Duchêne¹

Iaret dirag e skeud

E Montroulez d'an daouzeg a viz Gwengolo 1897

gand

Ch. Rolland

euz Gwerliskin

Charlez Cornic Duchên, martolod kaloneg,
Unan a wella mab 'deus bet or bro roheg,
Setu deut an deiz a hloar en da vemor !
Paotred vad Breiz-Izel n'ankounac'hfont biken
Ar re 'deus difennet or bro war an dachenn :
Abred pe ziwevad e tiskouezfont d'ar bed
Ar re 'zo eveldout gouest da veza meulet.
Ar re 'ne² 'zo memez en Pariz o veva,
D'ober dit lealded a zo er penn kenta :
Int eo o-deus roet d'ar gêr-mañ da skeudenn,
A zalho deuz ouzit ar zoñj da virviken.
Or mennad d'an dud-se a enor evel-se
O mamm-vro, dre vraster ha nerz he bugale :
Dirag da skeudenn-ze, Cornic, hag ez ano,
Ni o zrugarekaa a-greiz or halono'.

Pell 'zo 'oa dleet deom ha da gêr Vontroulez,
Sevel dit ar skeud-mañ en kichenn da vên-bez ;
Er gêr 'leh 'oas ganet, a-grenn tostig d'ar mor,
War b'hini³ 'peus douget armou Frañs gand enor.

Daoust piou mui egedout 'n-eus talvezet kaved
Ar skeudenn gaerroh-se digand ar Vretoned ?
Darn all 'barz er brezel 'n-eus bet diskouezet sklêr
Mui eged evidout ar merk deuz e vraster !
Piou 'oe muioh faeüz biskoaz rag ar maro !

¹ Charl Cornic Duchêne : Bet ganet e Montroulez d'ar 5 a viz gwengolo 1731, marvet e Montroulez d'an 12 a viz gwengolo 1800. (Notenn, e galleg, gand an oberour).

² 'ne : aneze.

³ b'hini : behini : implijoud a ra "pehini", ha "pere". Levezon ar galleg, evel ma veze greet gand an oll skrivagnerien en amzer-ze.

Med Cambronne, pell goude, war dachenn Waterloo ?
Peleh 'mañ 'n den a vor er bed-mañ, med Jean Bart,
A gement a vefe bet dit-te treh na par ?
Ha n'e-peus ket bet en da amzer genta
Eur vuhez trubuilluz evel an dud vrasa ?
Mab d'eur paramantour, deut deuz ar bobl izel,
'Poa ranket gouren stard 'benn 'n em gaoud ken uhel.
War listri skañv da dad d'an oad a naonteg vloa'
En-kreiz ar vreizerien⁴ 'oas gwell terrubl dija.
Greet e-poa 'benn neuze warne unneg kampagn
En Amerik, Bro-Zaoz, Portugal hag er Spagn,
Ha dre leh 'tremenes e spontaes ar Zaozon,
War bere e sailles ker gwaz hag eul leon !
'Oas dija ken brudet en pevar horn ar vro.

Etre Bro-Zaoz ha Frañs pa darz ar brezel ru',
War listri ar Roue te oa lammet diohtu,
Leun a dan, a zever, ha prest d'en em ganna
Ha da skuilla da wad 'vid difenn ar vro-ma'.

Ma ne oas ket gwarner⁵ war listri braz ar Frañs
Ne oas ket evel kalz deuz gwad an Noblañs :
D'ar houlz-se ar re-mañ a entente beza
Dre-oll hag en peb leh er hargou uhella ;
Eur preizer eveldout, d'an aotrounez groñs-se,
N'helle mond re uhel anez noazoud deze ;
N'eo memez 'med gand poan, dre m'oas ker kaloneg,
'Oas anvet, despet de⁶, eun deiz gand Loeiz Pemzeg,
Sturierig izella war eun tamm lestrig⁷ kêz
D'eo⁸ taolet er blotou evel eur goz botez (!)
Gand p'hini⁹ te 'poa greet taoliou kaer koulskoude
Ma oas greet Letanant prestig gand ar Roue.
Nag a bed lestr-brezel n'az-peus ket kemeret !
Gand ar reou bihan 'veze ennout fiziet ;
'Kreiz ar poultr, ar moged, trouz an tennou kanon.
'Pad ar brezel Seiz Vloaz meum bet deuz ar Zaozon.

Eur wech, gand daou-hant den, en noz, en-kreiz an tan
En-tal enezenn Eusa, gand da lestrig bihan,
A-eneb tri lestr-braz, warno eur bern Saozon,
Da dud hanter-lazet, kouezet da bavillon,

⁴ ar vreizerien : ar Gorserien.

⁵ gwarner : rener.

⁶ de : dezo.

⁷ lestrig : An Agathe.

⁸ D'eo : ? taolet e oa bet al lestr-se er blotou. Eur vi-koukoug a zo sur a-walh.

⁹ p'hini : pehini. an hini.

An oll ouz da bedi da zond d'en em renta,
Te, 'vel eul leon euzuz, a chom bepred e-sa !
Ha gand da vouez nerzuz, dispont rag ar maro,
'P-oa adlaket da dud da zailla d'an armo',
Gand kemend a gounnar, ma kreñchont dir ha tan
En genou ar Zaozon, 'rankjont 'n em denn buan !

Goude eun taol ken stard, 'oas uhellaet arre¹⁰,
Hag er bloavez war-lerh war gorre *Ar Prothe*,
'P-oa kemeret unan a wella listri saoz,
Evitañ da zougen eur bern kanoliou groz.
Neuze, droug 'n o halon, seiz den nobl ofiser,
Noazuz¹¹ deuz da halloud, da hloaz ha da vraster
'Devoe da hegaset¹² da eur hann¹³ penn-ouz-penn
'Leh e-poa o zrehet o-zeiz war an dachenn !
E-leh dond d'az tougen¹⁴, d'az meuli, d'az krataad ;
Ministr¹⁵ ar mor, goude, ne ree 'med da hoapaad
Ma oas skuizet kement deuz e zislealded,
M'az-poa kuitaet ar mor, ar brezel echuet.

War enezenn Sant Jord, en kichenn kêr Vourdel,
E oas en em dennet, haroz ker Breiz-Izel !
Med eno en diskuiz 'poa prestig diskouezet,
Koulz e-barz ar brezel 'oa gwad en da wazied :
Pa oa bet dirollet an dour dreist ar Garonn¹⁶
Ar vro a-bez war-veuz, 'glevjout 'med da galon !
C'hweh-kant den en argoll 'poa eno saveteet,
Ha 'pad tregont devez diwar da goust, maget.

Ar Roue dre lizer a verkas dit e stad ;
Ha Bourdel a "vourhiz" a deuas d'az krataad ;
Ma oas marher Sant-Loeiz¹⁷ a-benn tri bloaz goude,
Eur merk an uhella en or bro d'ar houlz-se.

Pa zigor ar brezel gand ar Zaoz a-neve'
Te houlennas diohtu mond d'an tan adarre !
E-pad an dizurz braz¹⁸ en Bourdel c'hoaz te 'oa
Koronel jeneral war gwardou ar vro-ma'.

¹⁰ arre : adarre.

¹¹ Noazuz : gwarizi enno.

¹² da hegaset : da gaset.

¹³ eur hann : eun duvell.

¹⁴ d'az tougen : d'az harpa.

¹⁵ Ministr : Sartine (Notenn gand an oberour). (1729-1801). Ministr ar mor e oe e 1774. Divroa a reas e-pad an Dispah braz. (Notenn diwar eur geriadur).

¹⁶ ar Garonn : e 1770.

¹⁷ marher Sant-Loeiz : eun urz bet savet gand Louis XIV.

¹⁸ an dizurz braz : = Dispah 1789.

Med pa deu ar spont braz, lesanvet an “Terreur”,
Out distroet kerkent, amañ ‘tal da vreudeur ;
En traoñ ster Vontroulez, ‘leh ‘oas en em ouestled
Er rest deuz da vuhez d’ober vad d’az konsorted :
Eur skol vartoloded e-poa savet buan
‘He-doa greet err vad iskiz en-touez ar bobl vihan :
C’hoant e-poa da ober, ‘veldout, tud a armo’
Da zifenn ar vro-mañ goude vijes maro !

Bete ‘barz ar maro out bet eur skwer dispar
A vraster, a enor ! ma oe war an douar :
Pa glevjout ‘oa ‘n em rentet eul lestr Frañs d’ar Zaozon
Prizonier heb emgann, ‘oa rannet da galon :
Da her, ‘vel hini Breiz, ‘oa *Trehi pe vervel*.
Ma kouezjout maro-mik, ‘vel gand eun tenn kanon,
Gand ar vez o weled Frañsizien ken poeltron¹⁹ !

Da ano, Charl Cornic, ‘zo bet pell ankouezet,
An istor bet garo e-barz en da andred ;
Med deut eo an devez ma ranko disklêria
Hag anzav da halloud dirag fas ar bed-ma’ !
Hirie ‘out digollet deuz kement a ankouez,
Er Mên²⁰ hag er gouel-mañ, ‘reer dit e Montroulez !
Da zremm gaer er broñs²¹-mañ, a chomo stag heb mar,
Evel skwer d’ar re veo a vo war an douar !
Da viken, ‘vi distro war-zu an Hanternoz²²,
‘N eun dispah ken terrubl ! ma kreno c’hoaz Bro-Zaoz !
Da vreh kreñv astennet ! da zellou dreist ar mor !
War-hed, prest da ziwall ar Frañs, Breiz hag an Arvor !

Pa vo savet eur Panthéon da dud vrudet or bro
Warnañ ivez ‘vezo garanet da ano :
Eno e lugerni en-kichenn breudeur all
O-deveus eveldout difennet Frañs gwechall
O stourm, o vrezeli war douar ha war dour
‘Eneb ar Zaoz treitour, he gwas a enebour.
Lakeet ‘vi en-kichenn an terrubl Duguesclin,
An tri haroz Surcouff, Bisson ha Tremintin,
Dugay-Trouin, Bomanoar, Olier-ar-Hlisson
Pere ‘deus eveldout bet dornet ar Zaozon !

A-dreuz an amzeriou, beteg ma vo fin d’ar Bed,

¹⁹ poeltron : (galleg) aonig.

²⁰ Mên : monumant.

²¹ broñs : arem.

²² an Hanternoz : an Norz.

Da ano er vro-mañ 'vo doujet ha meulet,
Gand paotred Vreiz pere a gano a-bouez-penn,
"Gloar ! enor ! meuleudi ! da Gornic da viken".

Ch. Rolland

Kinniget d'an itron Alexandre, en Chuchuniou a Blouyann,
ha d'he herent deut a ouenn-dud Cornic.

Gwerliskin, d'an 10 a viz Gwengolo 1897.